

10



CHANSON NEVEZ

VOAR SUJET

Huenadou eun den Yaouank

A TREGUER

A FOURDELISEN AR YAOUANKIS

Rimet gant bars ar Preskil.



Voar eun ton gallec :

LE JEUNE MARIN ET ADÈLE

Reyonnou an eol a dars brillant fleurieu an douar o c'hoarzin,
Boljou huel ar firmamant zo glas vel deillou gliszinn,
Ar lapouset a gan meulodi Doue
A me denn a chom en poann goude intent neze.

Finn zo dan drubuil em speren eur momet tranquile,
Vel eur batimant relachet en abri deus ar mare,
Deu scrivan eur guentel deu gana dren Arvor,
Deu iaouankis Breis-Izel a trouienou Trecor.

Me zo ganet er vro breton bars en escopti Treguer,
En arrondissamant Lanbuon tost deu Vordik a rivier,
Eko a rivier ze da moes a ro revauch,
Deus traouienou Menebré a da-ze mor ar Manch.

Amzer douç meu bugaleach emeus tremenet zeder,
Deu bemzec vla antren er golach en Siminer Landreguer,
En mesk an dud savant d'ober ar galec,
Ma c'hentan devouamant a oa bezan belec.

Goelet ar veleyn ornet o sevel ous an auter,
A klevet o moes o prezec lezen Doue er gader,
Pouvoir o minister a rent meur c'halon tom,
Ous cador ar Pape Sant Per ac ous an illis Rom.

Pa gleven ar musik sklitin en cathedral Landreguer,
Horganisan an toniou latin ma c'halon a ve zeder,
A saven ma speret en uelder dann êe,
Vit goulén bezan belec ministr deus ar gouir fe.

Mes red e cad noad a studi, choazet ac obeissant,
Beurs ma ligne aseblant din a me-zo ket a dournant,
Ar vue zo teval goelet an den zo ber,
Neket tra facil dival dirag jaç an amzer.

Bemde a savet gant aket ac en avel ar goué zapin,
Goude ober ar c'hour galec a studi en ar latin.
Bep bla ma jouissans deus pris kenta ma c'hlast,
Speret voalc'h de nem avans mes an drouk heur em flat.

II

Recevet meus eur c'helou goude eur vision spontus,
Ma zad zo en danjur ar maro, den util carantezus,
Gant conje ma mestro en em renten er guer,
Mesk ma erent en canvou penos ret ma zad-ker.

RESPONT A GOMJOU DIVEZA AN TAD MAD

- O c'hortos an heur ma buguel war goele trist ar maro
- Me renk breman o lezel mez sentet euz ma c'homzo,
- Obeisset divlam kuitaet ar golach,
- Roet assistans do mam da derc'hel e menaj.
- A conduet ho bue fur c'houi zo ar mab henan,
- Retket d'ho mam displijadur tre ma vo bars ar bed man,
- Zelet o c'hoarezet evel ho pugale,
- Gant Doue ezoc'h galvet vel kulateur deze.
- Gred usaj mad deus ar moyen a chom guenec'h ar bed-mae,
- Roet lod an e d'ar beyen Doue deyo do pean
- Ouspen ma dimeset bep ma teufet en oat,
- A c'houi ac o c'hoarezet bet tud a ligne vad.
- A beved tout peuc'h a virjin vel bugale d'Israel,
- Vezet ket jalous vel Cain a lazaz e vreur Abel,
- Priet a bugale me ro dec'h ma bennos,
- Gras dimp da-ruet en év assambles da repos.

AN DEN YAOUANQ

O derves anken c'houero m'ar zo poan war an douar,
Ma mam en em dol a warnon feblisset gant ar glac'har,
Ma zad zo vervel, o cruellan brevaj !...
A me rank dilexel ma studi er golaj.

O planeden infortunet colet e an esperans,
Veze ket ministr d'ar vrettonnet dindan gouvernaman frans
Galvet hon gant Doue dre comzou eun tad mad,
D'asistan ma ligne toman a ra ma goad.

Trizec blaves meus bevet hep cavet displijadur,
Ma c'hoarezet zo dimezet pa deus cavet o c'havantur,
Bremen er maro kruel ra separasion,
Tre ar mam ac he buguel o pebeus ran kalon.

III

Manet hon bremen ma unan en kreiz trubuil ar menaj
En mesk ar labouriou a boan an tempest ac an oraj,
Ret e klask fortun vab vel guejal mab Tobi,
Pedi a ran ma el-mad oar-ze d'am c'hondui.

Bet meus adres eur plac'h fur a skrivet dezi lizero,
A recevet gant plijadur respont deus ma gouleno,
Gant pluen an amour gret asination,
Da goul Sant Ian-Badezour bars en ker Lanhuon.

Salut Mari-Louis, plac'h prudent, me anons dec'h karante
Ce a meus an desir ardant d'entren'no societe,
Recevet ma requet hep ober dismegans,
A goude m'ar permetet nimp gomzo en silenç.

AR PLA'CH,

O humilite den yaouanq na verit ket ar refus,
Neus na perles na diamant d'am rentan ken evurus,
Vel Turen en arme me voel eun den fidel,
Baleomp dre an assamble en mesk tud Breiz-Izel.

Derves hiran debes a bla tremenet vel eur skeuden,
Mesk ar blijadur ha joa en fin hom promenaden,
Choañ eur merk amitié roc kuitaad Lanhuon,
Test deus hom sincereite dom nassion.

Eis kilomet deus Lanhuon hon deus comzet én sekret,
Me meus oar poan an union ha peñ occup hon speret,
Ac ober promesse vel guis an dud yaouanq,
Deus n'em gavet er plaç-ze vit mont da Wengamp:

Skeuden en de ho luguerni tud Breiz oll en mouvamant,
Digor e tresoriou Mari ebars en porchet Gouengamp,
A divrec'h mam Jesus a stard oar e galoun,
Er belerinet hirvoudus houl e froteksion.

Neijet evel diou durzunel zivoul dre an traouyennou,
Da di patronez Breiz-Izel, d'adres dezi on pedennou,
Daoulinan er porchet rog antren en ilis,
Da saludi guir portret avocadez Breizis.

Prosternet dirag an imaj a remekis ma mestrez,
E derou a red oar e bizajeus n'em bidin ar Werc'hes
Eur soñj vel eun uvre a disken em sperent,
Nom ket choaset gant Doue vit beza unisset.

Goude fin hon devotion a gwelet eur presanchou,
Bars en ilis caer hon itron en recompens d'he miracloù,
He welen ho antren tud guisquet en peb stum,
Gant ho guilleno guen ho vale hum ha rhum.

Gouelet ar remp ar yaouunquis deuz Guénet hac a Léon,
Gant pres ho antren en ilis, gai ha joauz ho c'halon,
Tud bro Gal ha Kernev, tud Trehuer ha Goelo,
Breudeur oll a bugale Rouannes an envo.

Disquennet petec eur blomen assembles gant ma mestres,
Da visitan er guir squeden deus burzudo ar Werc'hes,
En dregre c'huellan man Gwer'hes-Guilziquour,
A tro oar dro an Elez ho arrosin ann daour.

Arrêtoomp aman hom speret sellomd dre lagat hom fe
An duellen hust d'ar porchet hac a gundu d'an Env,
Dreïs sav hom peden hen huelder Marie,
Hanval ouz dour ar blomen dien Elez d'arozi.

Eur sourcenou pour naturel dislonbuet gant douar breis :
Ac eur pedenno immostel a parti d'euz hom c'hreis
A rent gloas da Doue ha d'hom mam puissant
Ac a deu benoz en ev voar an oll den Gouengamp.

Trompil er divertissamant ha joaustet er Vali,
Ho troq plijadur évit arc'hant d'ar youanquis disourci,
Da consol ma mestres neus quet nep joaustet.
Ditro d'ar guer assemblez quen a vo bretonnet.

Sortiet deus a guer Guemgamp soudan me meus goulenet.
Petra eo eur sujet merc'h yaouanq m'o gwelan qen contristet
Me gred ho peuz chanchet cren ho opinion.
Voar pezh he moamp promettet enn pardou Lanhuon.

EUR PLAC'H

Tan eur garantez em peutrin hust d'an pen en oragen
Ma c'halon n'eur mor a chagrin dre ner ma planeden,
Pozet ma esperans vaar vertu ho furnez,
En gortez d'an allians renverset da james.

EUR POT.

Choui heo eur foundalisen sencer gant ma c'halon idolet,
En graç espliquet muoc'h sclair m'ar méritan ho secret

Petra heo eur sujet piou zo occasion,
Goude quen ferm promettet d'hom séparation.

EUR PLAC'H.

Mim vo secret vel Mélaui pini n'ahas euz he zad,
Vit he empech da non venget deuz comzo désagréabl
Dervez eur jugamant gant balanç eur justis,
Dorn eur mest oll puissant a poëzou eur valis.

Separet he voar an douar eur fidelan carante,
Meus quet en desvez eur pouvoir d'antren n'ho societe,
Mar ven obeissant me vez Esclaves,
Ho contradin d'en arc'hant, hep consultin er furnes.

EUR POT.

Gleet heo an obéissans d'ar bugale voar an douar
Mez ne ret james alianç tre sentimencho avar,
Er haëran jardino ha voëler plant yoanc,
Vel dizabet ho gruio ho vevan languissant.

EUR PLAC'H.

Ho vit carante an arc'hant n'amp rento quet esclaves,
Me antreo en Gengamp hac vezin leanes,
Pidin, bevan, mervel, interret mesq eur ros,
Adieu ma mignon fidel, chans dec'h, peoc'h a benoz,

EUR POT.

- « Couraj ; fourdalisen hep par jalous hon deuz hoponer,
- « Me ho car pobret vel ma c'hoar tremen rei an erreur,
- « Bevomq hen esperanç ha gant fin ar bresel
- « He forfomp en alianc ha bado éternel.

Repoz en peuc'h ouz troad ar groas, préférans de garant
Ta recompans a vézo bras hen distrou deuz ar vue,
Ha me ha hircvoudou dre ar bed vel eur profet,
Ranverset ma oll desiriou hep bezan meritet.

Adieu gant glac'har merc'h yaouanq ret eo dim non consolin
Vit treuzin en desert epouvant voar comz ar profet Eli,
Gueillomp hon planeden, dougomp hon croaz hep clem,
Caeroc'h vo hon curunen en pales Jerusalem

Digor te speret den yaouanq quemer kentel, me glac'har,
Er vision deus ma zourman bo tremen dre an douar,
Map en pen ga supoz kaat joa en pep marée,
Ha Doue just he dispos herve he volonte.

(Propriété.)

Pierre RAISON.



Lannion, librairie Mlle C. DUCHEMIN